

# KANNAËDIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 100 Meurzh - Ebrel 2017 Priz : 3€

## Deuet eo er-maez “Katekiz ar Vugale”

Abaoe 1943 ne oa ket bet embannet ur gwir levr katekiz evit ar vugale. Al levr-mañ, bet kempennet diwar ul levr katekiz brudet e galleg en deus diskouezet e berzhioù mat d’ar mare ma voe dilezet ar c’hatekiz klasel er parrezioù : ar vouchenn vara, ur c’hatekiz a gaver bepred e gwerzh e ti Elor, e teir levrenn. Pal pennañ al levr-mañ eo prientiñ ar bugel evit e Bask “bihan”, e Bask kentañ. Evel-just e c’hell bezañ implijet evit bugale vrasoc’h, krennarded ha tud en oad zoken. Laouen

bras omp o kinnig al levr kaer-mañ, 250 pajennad, gant 120 skeudenn. Aes-tre eo ober gantañ. Diazezet eo war ar skeudennoù, ar bugel a sell outo, hag an tad pe ar vamm pe ar c’hatekizer a implij ur roll goulennoù eeun evit sikour ar bugel da gompren. Goude-se ez eus un destenn da lenn


hag un destenn «traoù da c’houzout». Erfin ez eus ur bedennig. A-raok na skuizhfe ar bugel e c’heller reiñ dezhañ tresadennoù da livañ : daou rummad anezho a gaver e ti Téqui (merket eo an daveennoù e dibenn al levr).

Spi hon eus e responto da ezhommoù ar familhoù a oar ez eo a-bouez bras ober katekiz d’ar vugale abred-tre evit treuzkas distroñs donezon ar feiz.

Savet eo al levr evit ur bloavezh leun, ur gentel bep sizhun da skouer, met implijet e vo e-doug tri bloaz betek ar gomunion gentañ. Ar c’hentelioù a vo gwelet bep bloaz ha donaet e

vint a-feur ma koshaio ar bugel. Hervez e oad hag e zoare, ha diouzh an amzer-liturgiezh eus ar bloavezh kristen e vo ret lezel kentelioù ‘zo a gostez rak gwelet e vint diwezhatoc’h, pe ez int bet gwelet dija hag e kavo deoc’h ne vo ket dav o adwelout.

Dreist-holl evit ar vugale etre 4 hag 8 vloaz eo savet ar c’hentelioù eta. Penndalc’hel eo ar bloavezhioù-se : dizoleiñ a ra ar bugel e “vMe”, kemer a ra plegoù mat pe fall, hag e ra e gresk oc’h en em zigeriñ d’ar vuhez, buhez e gorf o kreskiñ, ha buhez e spered ma c’hwezh ennañ Gras Doue. En ur sellout ouzh ar skeudennoù e vo aes komz en un doare eeun ha diardoù gant ar bugel, hag e vo piket e galon glan a vugel, ha broudet e c’hoantgouzout.



Kement-mañ ne vo ket tra-walc’h : ar bedenn bemdeziek ha reoliek gant holl izili an tiegezh a zo a-bouez bras, ha skouer vat ar gerent en o buhez pemdez ivez ha dreist-holl. Un ene en deus ar bugel. Un deiz e vo treuzkemmet e ene da vezañ damheñvel ouzh Doue da c’hellout arvestiñ outañ fas-ouzh-fas, en e c’hloar. Kement-se a c’hoarvezo mar plij gant Doue, gant ma vezo desket a-zoare gant e dud, Tad ha Mamm, e gatekizerien, hag ar veleien.

24,5 euro franko da EAT Kergreven 29800 Trelevenez.

## Macron hag an Tiegezh

Pedra da vezañ nec'het a zo gant eil tro a votadegoù. Emmanuel Macron, uhelsavet gant an UMPS unanet, ar MEDEF, an U.E., an UOIF anvet bremañ «*Musulmans de France*», ha me 'oar-me c'hoazh... pe Marine Le Pen, ar vroadelourez c'hall na anavez ket gwirioù Breizh, a fell dezhi raskañ rannbarzh Breizh ?? Hor savboent-ni eo en Emglev An Tiegezhioù a zo « **An tiegezhioù da gentañ !** » : n'eo ket diaes gouzout evit piv chom hep votiñ pa vezer stag ouzh an uhelvennad-mañ : mad hor familhoù, desavadur hor bugale. Ma digarezit : Breizh a zeu war-lerc'h, pe gentoc'h pa vezo tiegezhioù brezhonek, bugale niverus enno, karantez etrezo hag evurus, e teuio Breizh da heul ar raktres-mañ nemetañ bastus evit Breizh : pep tra a zo da adsevel abaoe m'eo bet distalet an vroadelouriezh kristen ordinal gant an «Emsav» gant touell ar Gleizelouriezh frankizour c'hwechonteizhat.

Dreist-holl e fell din, gant ar pennad-mañ, dibikouzañ an dud war boent Macron hag an Tiegezh. War lec'hienn EAT hon eus lakaet ur video ma weler Macron o komz diwar-benn an tiegezh d'ur ur c'hlasad kentañ derez : «*Ar pep pouezusañ evidon ez eo e vefe savet mat ar vugale ha karet*». Piv a c'hell sevel a-enep komzoù-toull a seurt-se ? Den ebet !! Komz a ra evit plijout d'an holl. Met se ne dalvez ket n'en defe programm ebet diwar-benn ensavadur an Tiegezh. Pelloc'h e lavar dezho en dije seizh bugel bihan : Gevier ! O vezañ ma n'en deus bet bugel ebet, ne c'hell ket kaout bugale-vihan ! Evel ar goukour a gemer neizh al laboused all, ar wirionez eo en deus hoalet ur vaouez torrdimezet koshoc'h egetañ. A galz : 64 bloaz, bez' e c'hellfe bezañ e vamm. Forzh penaos ez eo diaes d'an oad en deus (39 bloaz) kaout kement-se a vugale vihan ! Macron n'eo ket tad ar vugale he deus engehentet gant an Aotrou Trogneux. Rak ma vije eñ an Tad hag an Tad-kozh, eus piv 'ta e vije an Aotrou Trogneux an Tad hag an Tad-kozh ?? Ur ster o deus ar gerioù, zoken pa gomzer ouzh bugale. Evel alies er politikerezh e kammer ar geroù da c'houleviañ an dud.

Lavarout a ra c'hoazh dezho «*Kalz a familhoù disheñvel 'zo : bez' ez eus tud o torr-dimeziñ, familhoù recomposées/adstummet, gant hanter-vreudeur hag hanter-c'hoarezed : ar c'heal e*

*vijed er memez familh evit ar vuhez-pad , se n'eo ket gwir !*» Eo da ! Gwir eo ! Ur bugel en deus ar memes familh e-pad e holl vuhez : an hevelep tad hag an hevelep mamm. Pep den n'en deus nemet un tad hag ur vamm : koukou ebet ne c'hell kemm ar wirionez naturel-mañ ! Ar pezh a c'heller skrivañ war ar marilhoù-kêr ne dalvezont nemet evit ar re a gav dezho ne dalvez ar vuhez nemet ur ...follenn-baper.

Ar familhoù-se ma komz Macron diwar o fenn n'int ket familhoù gwirion : n'int nemet familhoù dre ziouer a wir familh. Ne c'heller ket ober ur familh eus ur «familh *monoparentale*/ungenek rak ur gwir familh – ha pa vefe aet da anaon unan eus ar gerent – a zo graet gant un tad, ur vamm hag o bugale. An tebet tiegezhioù heñvelrevat a zo difrouezh dre natur : n'int ket tiegezhioù, m'o deus ar gerioù ur ster c'hoazh. Hag ar familhoù adstummet a zalc'h en o c'hreiz kleizenn an disfealded ouzh ar briedelezh kentañ, a chom talvoudek bepred : Macron e-unan a gomz eus hanter-vreudeur hag eus hanter-c'hoarezed, daoust hag «hanter-dud» e vijent ?? An daou hanteradur-mañ a verk anat n'eus nemet ur briedelezh talvoudek : ar briedelezh didorr, gant ur gwaz hag ur vaouez unanet ha feal etrezo, ha mennet da gaout bugale. Ha perak ? Peogwir ez eo ar garantez donezon, ha ne c'heller ket reiñ div wech ar memes tra. Pa timezer ne brester ket e vuhez, her reiñ a reer. N'eo ket c'hoari eo ez eo ! «*Adalek bremañ ha betek eur va zremenvan e ouestlan va buhez da oberiañ evit ma vi evurus*», sed ar pezh a reer pa timezer. An hini na gar ket e gwirionez n'eo ket gouest da zerc'hel d'ar bromesa gaer-mañ. Prouenn ar garantez eo ar briedelezh eta. Amañ e weler ez eo faos ar briedelezh republikan a aotre an torr-dimezi, pe ar pacs, a aotre argasadur ar bried pe ar bried, pe c'hoazh ar briedelezh muzulmat, a aotre al lieswregiezh.

Ar re a vev a-gevret hep bezañ dimezet a ra evel al loened : e bondougoù an den emañ ivez retvezh an engehentañ, na petra 'ta, evel-se emañ. Met gant holl sevenadurezhioù ar bed ez eo bet ensavet evit ar paradur-se ar briedelezh (a zo bet lakaet da sakramant gant an Iliz), evit ma vo ar retvezh-se treuzdremmet en ur gread libr, e pep frankiz. N'eur ket rediet da zimeziñ. Al loened ne zimezont ket, nag an azpried gant e

serc'h. Ha perak ne reont ket ? Peogwir n'o deus ket divizet en em reiñ da vat. Un diouer a garantez ez eo eta. N'int ket gouest d'ober ar gread-mañ e pep frankiz. Nasket int, dalc'het hepken gant ur bondoug na leunio ket o buhez, ha ne glaskont ket evurusted an hini all met, e fin ar gont, o evurusted dezho-int nemetken. Er briedelezh - kristen pe naturel -, e klask an daou bried evurusted egile : kavout a reont o evurusted-int e evurusted egile ! «**Da levenez a zo va levenez, da boanioù a zo va foanioù**». Ne reont nemet unan. Seurt familh ne c'hell ket bezañ disrannet. War seurt tiegezhioù ez eo soliet start ar gevredigezh hag e ro frouezh mat : n'eo ket frouezh put ar bornografiezh, an drammoù a bep seurt, an emlazhioù a vil-vern bep bloaz e Frañs, kantmiliadoù a vabiged lazhet e kof o mammoù, hag all. N'eus nemeto a zo gwir familhoù eta.

Macron n'en deus ket komzet eus an tiegezhioù-se avat, daoust ma-z int patrom gwiriek nemetañ an Tiegezh. Komz a ra en o flas eus «**tammoù familhoù**» pe eus «**marmouez-familhoù**». Komz a ra eus doareoù familhoù disheñvel hep daveañ d'ar familh patromel, uhelvennad ar familh, unanet, e-lec'h e ren ar garantez etre ar priedoù, ur garantez emroet, gradus.

Er video e c'houlenn ivez Macron ouzh ar vugale : «*Daoust hag ez eus lod ac'hanoc'h a anavez kerent heñvel o rev ?*» Hag e weler neuze ur plac'hig du braouac'het gant e gomzoù dinatur. Piv 'ta a c'hell krediñ e c'hell dont bugale diwar pared heñvel o rev ???

Ha neuze ar Frañsizien – hag ar Vreizhiz en o zouez – a zo o vont da vouezhiañ evit fiziout ar

Stad C'hall en un den na zouj ket ouzh ensavadur naturel an tiegezh, kellig diazez korf ur gevredigezh, na c'hell heptañ nemet kouezhañ. En Aviel e lavar deomp Jezuz : «*An hini a vez feal en traoù disterañ a vez feal en traoù brasañ, hag an hini a vez dizonest en traoù disterañ a vez dizonest en traoù brasañ*» (Lk 16, 10). Foll eo fiziout en un den a ginnig falloniajoù evel pe vijent traoù reizh . Ha da vugale diantek ouzhpenn ? Ha gant bennozh ensavadur an Deskadurezh-Stad e vez graet se da zek milionoù a vugale ! Penaos, gant se, e raint o c'hresk hep bezañ distummet o-unan en o askre gant seurt binimoù ? Na pegen harozek e teu da vezañ sevel un tiegezh doujus ouzh al lezenn naturel, hep komz eus an hini gristen, pa-z eo karget ez naturel ar gerent da vezañ deskoniourien gentañ o bugale en ur gevredigezh a zo mennet hiviziken da saotrañ eneoù o bugale gant falloniajoù, ha kuzhat dezho alc'houez an evurusted : an emroadenn a galon, ur wech da vat, e pep frankiz, er briedelezh evit an darn vras-tre eus an dud, pe er velegiezh, pe c'hoazh en ur vuhez dizimez emouestlet d'ar re all : kalz kelennerien pe skolaerien, da skouer, a chom dizimez da skouer peogwir eo leuniet o buhez roet-holl d'o micher a zeskoniourien e servij ar gerent, ha pet ha pet skouer all a c'hellfed kavout. Pa vezer roet-holl ez eo leuniet ar galon.

Hiziv ez eo deuet deskoniadur ar sioù da vezañ al lezenn voutin rediek. Dizale, gant Macron, e vo difennet diskleriañ ar gwirionezioù eeun-mañ evel emañ o paouez ober.

**T. Gwilhmod**

## Penndalc'hel eo meizad ar “vroad” evit Breizh

Gant ar Brexit, dilennadur Donald Trump e penn Stadoù Unanet Amerika, luskadoù mui pe vui broadelour o sevel e meur a vro en Europa, ha nevez 'zo e Bro-C'hall, ersavioù darfellek<sup>1</sup> tud ar Reizhiad, eus an tu kleiz a-bezh, met ivez eus darn eus an tu dehou, oc'h ober o seizh gwellañ evit herzel ouzh un danvez-prezidant a vegozhfe, sañset, gant e roll-mennadoù, un urzh diazezet ganto, da genstrivañ en dilennadegoù, e c'hellfemp soñjal ez omp degouezhet e dibenn un doare trovezh<sup>2</sup>, bet digoret, lakaomp, gant ar

<sup>1</sup> Darfellek : *hystérique*.

<sup>2</sup> Trovezh : *cycle*.

Sklerijennoù. Ha bremañ ma-z eo sklaer e amkanelezh<sup>3</sup> – ur gouarnamant-bed - da vuio'h-vui a dud, e welomp un doare luskad, a denn da vezañ gwitibunanez, a fell dezhañ stankañ an hent d'ar gwallreuz a-raok dezhañ dont da vezañ dihepkoradus<sup>4</sup>.

En Europa da skouer, un unaniezh a veze c'hoantaet gant an darn vrasañ eus ar pobloù europat, rak diskouezet e oa bet dezho evel un araokaat gwirion e pep keñver evito, a zo

<sup>3</sup> Amkanelezh : *finalité* ; *ger all* : *finvezhelezh*.

<sup>4</sup> Dihepkoradus : *inéluctable*.

bremañ arzalet<sup>5</sup>, ha lod broioù a fell dezho, evel Breizh-Veur, adkavout o stad kent, gant o harzoù, o lezennoù, o frankiz, o riegezh<sup>6</sup>... Ret eo lavarout ivez eo bet digoret daoulagad ar pobloù europat gant darvoudoù nes a-bouez, evel aloubidigezh Europa gant an dreuztiriaded a-vil vern o tont eus Afrika pe eus ar Reter-Nesañ. Gant an doare ma-z eo bet meret an dra-se gant an aotrouniezhoù europat, divarrek da herzel outi daoust d'ar c'halloudegezh a zlefe derc'houezañ 28 bro unanet evit difenn o lazioù, e hañvalfe bezañ bet c'hoantaet ganto. Al lezennoù kevredigezhel, evel an dimezi heñvelreviat hag an devoù en-dro d'ar sioc'hanerezh diarc'het evel ur gwir evit ar merc'hed, mennet gant an aozadurioù bedelour, ma vez sentus outo an aotrouniezhoù europat, bet mouezhiet daoust da eneberezh lod mat eus poblañs ar pobloù, a zistruj tamm-ha-tamm an tiegezhioù, diazez ar gevredigezh, ha dre heulret<sup>7</sup> ar broadoù, hep komz eus ar merzad o deus kollet un toullad Europiz o hennadelezh. Holl bobloù Europa o deus etrezo un Istor boutin, dre Henistor o c'hevandir hag ar sevenadurezh kristen war-lerc'h, hogen pep pobl europat he deus un Istor piauvel ha ne fell ket dezho en em zizober dioutañ, ar pezh ne vir ket outo da chom bepred europat ha nes d'ar pobloù europat all, hogen a ziforc'h anezho diouzh pobloù ar c'hevandirioù all. Degemer un nebeut hiniannoù eus ar pobloù estren-se, a vare da vare, n'eo ket ur gudenn rak buan e vezont enteuzet er boblañs lec'hel, hogen degemer milionoù anezho a-daol-trumm a zo ur gobidell all, en arvar da vezañ distrujet, digempouezet da vihanañ<sup>8</sup>, eo sevenadurezh Europa gant-se. O



<sup>5</sup> Arzaelañ : *critiquer, reprocher.*

<sup>6</sup> Riegezh : *souveraineté complète.*

<sup>7</sup> Dre heulret : *par voix de conséquence.*

<sup>8</sup> Un dra na vez ket lavaret a-walc'h eo ez eo begenn ar broioù paour-se eo a dec'h kuit : dre-se ne gendaolont ket ken da ziorren o bro c'henidik. Gwashoc'h a se : ar feur-kreskiñ eus poblañs ar broioù paour a gresk o foblañs a gantmilionoù bep bloaz. An nebeut milionoù a dec'hidi ne wella ket stad ar broioù-se eta, e doare ebet.

vezañ ma ne hañval ket Unaniezh Europa bezañ gouest da herzel ouzh an aloubadeg-se, e fell da vroioù evel Hungaria, Polonia, Slovakia, Bulgaria... ober al labour-se o-unan, da lavarout eo, stankañ an hent d'an alouberion vuslimat, rak Muslimiz ez int evit 90% anezho. Hag evel-se eo e vez keal ganto eus distro ar broadoù hag eus ar vroadelouriezh : pep hini a rank chom mestr en e vro ha Doue a rank bezañ mestr war an holl...

An distro-se eus ar pobloù ouzh ar vroadelouriezh en em c'houlennan petore perzh he deus Breizh el luskad-mañ. Distaolet eo bet ar vroadelouriezh gant an Emsav, pe ent-resisoc'h gant al luskadoù lies o deus amparet anezhañ, war-lerc'h brizh-dispac'h miz Mae 1968, evit degemer ar sokialouriezh evel arm andistremenadus evit dieubiñ Breizh ha diluziañ he c'hudennoù. Pell da vezañ dieubet eo bet Breizh gant ar rannvroadelouriezh kleizelour-se, evel ma c'heller dezastum o lenn pennad Yann Vallerie, war Breizh-Info.com

(25/4/2017), pa lavar en deus gounezet an FN muioc'h a vouezhioù en dilennadegoù prezidantel eus an 23 a viz Ebrel, eget en dilennadegoù rannvroel diwezhañ, daoust m'he deus lavaret Marine Le Pen e felle dezhi desteziañ<sup>9</sup> ar rannvroioù. Evitañ ez eus un dra a zo nec'husoc'h evit un toullad tud e Breizh, eget kollidigezh ar rannvro, hag ez eo aloubidigezh dizehan an enbroidi, gant an heuliadoù enkreuzus a zever diouti, an andiogelroez, an islamidigezh... ha n'eus nemet an FN a vefe mennet da ober d'an dra-se paouez. Al luskadoù rannvroelour kleizelour n'o deus graet netra er ster-se, pa ne oa ket evit gourbann e vije Breizh digor he dorioù d'an holl. Ha Yann Vallerie da guzuliañ da luskadoù an Emsav da gemer ar gudenn-se e kont, evit kaout ur chañs da rastellat un tamm muioc'h a vouezhioù en dilennadegoù da zont.

Darn en em c'houlennno marteze, daoust hag ez eo Breizh ur vroad c'hoazh, evit gellout en em

<sup>9</sup> Desteziañ : *supprimer.*

zaveiñ d'ar vroadelouriezh. Evidon e chom ar Vrezhoned ur bobl disheñvel diouzh ar bobl all a vev en e gichen, da lavarout eo ar C'hallaoued. Bez' e tegas an Istor ar brouenn deomp. Ur yezh dezho o deus ar Vrezhoned, hag un tiriad par e c'horread da hini meur a Stad all en Europa, Belgia, Izelvroioù, Luksembourg, Danmark, Slovenia... neuze ez eo Breizh ur vroad. Ur vroad nac'het, muturniet, mac'hagnet gant ar Stad c'hall ez eo Breizh avat, abaoe m'he deus lakaet he c'hrabanoù war hor bro, hogen chom a ra ur vroad daoust d'an taolioù skoet dezhi. Evit ar pezh a sell ouzh ar brezhoneg e oar ar Stad c'hall ez eo ur yezh, ur merker galloudek eus hennadelezh ur bobl, ur vroad – en ur sontadeg nevez 'zo, e oa ar galleg ar merker hennadelezhel pennañ evit 64% eus ar C'hallaoued<sup>10</sup> – ha setu perak he deus stourmet kement ar Republik da lazhañ ar brezhoneg. Ar c'hrennlavar "Hep brezhoneg Breizh ebet", n'eo ket komzoù goullou evel-just, met a c'hellfe bezañ klokaet marteze gant : "Hep ur Stad vrezhon dieub e chomo ar brezhoneg ur yezh a eil renk e Breizh", rak o chom er Republik c'hall e ouzer e raio bepred ar Stad c'hall he seizh gwellañ evit skoilhañ adsavidigezh ar brezhoneg en e wirioù leun, p'emañ an holl vinvioù lezennel etre he daouarn, hag ivez lasoù ar yalc'h. Hep ur chadenn skinwel penn-da benn e brezhoneg da skouer, evit reiñ bemdez d'ar Vrezhoned ur welusted eus o yezh, hag ar c'hoant d'he c'homz, e vo aner un tamm mat eus ar strivoù graet hiziv evit adsevel ar brezhoneg oc'h ober e zalaroù en e dakadoù hengounel. Ur skouer eus mestroni ar Stad c'hall war benveg ar skinwel ez eo tonkad Bro-Naoned e lec'h ma ne vez mui skingaset bep sizhun an nebeut eurvezhioù brezhoneg roet dre c'hoñvor<sup>11</sup> gant France 3, abaoe ar rannvroeladur ha distagadur Bro-Naoned diouzh Breizh evit he lakaat e rannvro Broioù al Liger. Kensolwezel<sup>12</sup> eo ar stourm evit ar brezhoneg gant ar stourm evit ar Vroad vrezhon, hag ar brezhoneg hep ar Stad vrezhon evit e harpañ da adsevel ne c'hell ket dont da vezañ en-dro ur yezh leun en he gwirioù.

<sup>10</sup> Philippe de Villiers, en e levr « *Les cloches sonneront-elles encore demain* », Albin Michel, 2016, a lavar p. 275 : « *La France et la langue ne font qu'un* » ha warlerc'h o venegiñ Fernand Braudel : « *La France c'est la langue française* »

<sup>11</sup> Dre c'hoñvor : *parcimoneusement*.

<sup>12</sup> Kensolwezel : *consubstantiel*.

Pa-z eo bet klevet digant Najat Vallaud-Belkacem, Marokadez a-orin, ha dalc'het ganti an div geodedelezh, marokat ha gall, maodiernez c'hall an Deskadurezh Vroadel, pa-z eus fellet dezhi e vefe kelennet an arabeg e Bro-C'hall en abeg d'an niver bras a enbroidi vaghrebat a zo er C'hwec'hkogn, ez eus bet evel-just ur bern tud o sevel o mouezh a-enep, war zigarez e oa tonket d'an dud-se en em emframmañ er boblañs c'hall, neuze, ne oa ket ret kelenn d'o bugale an arabeg, hogen kentoc'h deskiñ mat dezho ar galleg. A-hent-all, em eus lennet un deiz er c'heñver-se, en ur sizhunieg pe war ar genroued, ul lenner o abegiñ e oa kelennet e Frañs brezhoneg, euskareg, korsikeg... perak neuze ne vefe ket kelennet an arabeg pa savfe niver ar Vuslimiz er C'hwec'hkogn tro-dro da eizh milion a dud. Kerkent em eus soñjet er Breizhad-se, disoñjet em eus e anv, en doa lavaret pe skrivet tu bennak en ur gelaouenn, e vez komzet muioc'h arabeg eget brezhoneg en Naoned, pe turkeg eget brezhoneg e Kemper. Gwir e oa siwazh, disoc'h an enbroerezh evel-just, met an dalc'h n'emañ ket eno. Ur yezh stag ouzh ur bobl eo ar brezhoneg ha stag eo ar bobl-se ouzh un tiriad a zo he bro, neuze ur gwir naturel eo kelenn brezhoneg d'ar vugale vreizhat en o bro, ar pezh ne vefe ket heñvel evel-just mar befe bugale Brezhoned divroet en ur vro estren. Goulenn e vefe kelennet dezho o yezh a-berzh-Stad ne c'hellfe ket bezañ diarc'het evel ur gwir ; an treuzkas yezh-se da vugale Brezhoned divroet a vefe neuze roll hag atebegzh an tiegezhioù, ar pezh n'eo ket bet graet alies, siwazh. Heñvel e tlefe bezañ evit bugale Maghrebiz, mard int tonket da en em deuziñ er boblañs c'hall, n'eo ket un dra penndalc'hel deskiñ an arabeg dezho.

Gant an holl draoù-se e welomp ez omp degouezhet en ur c'hammdro eus an istor e-lec'h e vez adlakaet e kaoz ren hep disrann ar pezh a zo bet degaset ha diazezet gant ar Sklerijennoù er bed kornogat, da lavarout eo al liberalouriezh hag an hiniennelouriezh, a oa tonket dezho freuzañ ar Stadoù, ar familhoù, ha kement tra a framme ar gevredigezh, a-benn d'hor c'has tamm ha tamm d'ur gouarnamant-bed. Ur bed distabil emaomp o legadiñ d'hor bugale ha d'hor bugale vihan, hag enkrezus eo evit meur a dud.

**Donwal Gwenvenez**

# Aozerion ar “Bibl Santel”

## 2. Marsel Klerg

Pell on chomet en etremar da c’houzout gant piv e krogfen da ginnig “Aozerien ar Bibl Santel”, rak ur c’henlabourer a gentañ troc’h eo bet Klerg evit Maodez Glanndour. Dre vras e c’heller lavarout en deus prientet war-dro 30 % eus an oberenn. Dre ma oa Klerg ampart-tre war al latin hag ar gresianeg, e loc’he Maodez Glanndour diwar labourioù Klerg evit peurechuiñ al labour, reiñ d’ar skridoù un tamm kened. An dra-se eo a oa perzh mat Maodez Glanndour, ur barzh e oa, un arzour, troet ouzh ar sonerezh, ne oa ket da gentañ ur yezhour, evel ma oa Klerg. Ur seurt kenglotusted a oa etrezo eta<sup>13</sup>.

30 % eus an oberenn a zo bet, pe troet gant Klerg : dreist holl an holl destennoù eus an Testamant kozh a gaver el liturgiezh katolik, war-bouez ar Salmoù hag Izaias, ha 2 Makabeed a zo adkavet ganeomp e dielloù KDSK Gwened ; pe neuze testennoù troet gant Klerg ha kempennet gant Maodez Glanndour.

Marsel Klerg (1912-1984), a oa ganet e Plouvaël (gg Plémet) e Breizh-uhel. a oa beleg, emsaver ha skrivagner brezhonek.

Evel skrivagner brezhonek e welimp pelloc’hik e reas kalz a droidigezhioù. Kalz pennadoù, danevelloù ha kontadennoù a gaver ouzhpenn er c’helaouennoù : Barr-Heol, Al Liamm, Hor Yezh hag Imbourc’h<sup>14</sup>. Menegomp ivez an dastumadoù bet moulet gant Hor Yezh : Un

<sup>13</sup> Ur c’henlabour frouezhus a gasjont da benn met ne ouzer ket perak e paouezas Maodez Glanndour da skrivañ e Barr-Heol : marteze dre ma kave diaes rebechoù Klerg war dibaboù Maodez Glanndour a-ziwar e labour-eñ ? Forzh penaos e oa anezho o-daou «personelezhioù kreñv».

<sup>14</sup> P’en doa paouezet da embann e gelaouenn e c’halvas e genskriverien hag e goumananterien da gaout Imbourc’h. Evel-se hon eus bet pennadoù gantañ hag Ernest ar Barzhig, ha barzhonegoù gant Anjela Duval.

Deiz a viz Mae, Faltazi an amzerioù kent, A-greiz kalon ar vro.

Evel beleg ne savas ket uhel en urzhaz e eskobiezh en abeg ma oa stag ouzh ar brezhoneg. Person unan eus bihanañ parrezioù Breizh izel e voe, hag e chomas eno, daoust ma c’houlenne digantañ e eskob kuitaat e barrez evit ma c’hellfed enteuziñ Bulien e pastorelezh pastell-vro Lannuon. Ne blegas ket.



Klerg  
hag  
Anjela  
Duval

Evel emsaver e ranker merkañ ez eo bet kadoriad kentañ Kuzul ar Brezhoneg, ur gengevredigezh a oa bet savet da zerc’hel d’ar skritur unvan evit ar brezhoneg, bet lakaet en arvar gant ur beleg all, eus eskopti Kemper, skolveuriad ha Patriot a zoare, ar Chaloni Falc’hun, e

1953. D’ar mareoù-se evit an hevelep abeg ivez en devoa ranket kuitaat ar Bleun-Brug ha kendalc’het en doa war e anv hepken gant e gelaouenn “Barr-heol war Feiz-ha Breizh” nevez boulc’het gantañ.

Ouzhpenn, evel emsaver, en doa studiet don ar yezh : un arbennigour war ar brezhoneg e oa deuet da vezañ, ha pergen war brezhoneg Treger e-lec’h edo o chom ; notennoù a bep seurt a gaver er c’helaouennoù, krennlavarioù poblek kristen en e gelaouenn da skouer, notennoù yezhadur talvoudus ivez. Dre se e c’heller bezañ asur war e vrezhoneg evit e labourioù war ar Bibl.

Ur yezhour e voe eta : ar gresianeg a ouie matre, ha studiet don en doa hini ar Bibl. Dre ma anaveze mat-tre an Tadoù eus an Iliz<sup>15</sup> hag al latin, ha liderezh Vatikan II ez omp sur ne c’hell ket e droidigezhioù mont a-enep kemennoù an

<sup>15</sup> War lec’hienn EAT e kavor e vurutelladenn dizamant eus embannadur ofis al lennadennoù e galleg (burutelladenn bet nac’het an embann anezhi gant kelaouenn e eskobiezh !), troidigezhioù tuek eus an Tadoù eus an Iliz. Al latin klasek, hini kantvedoù kentañ ar Gristeniezh, a anaveze mat-tre eta.

Iliz war gudenn empentadur ar Skriturioù. Diwar ar c'hembraeg, a gomze mat-tre, en deus lakaet en hor yezh barzhaz Aneirin ha barzhaz Llywarch Hen. Diwar ar saozneg en deus troet Othello ha Romeo ha Julieta. Diwar ar galleg en deus troet ur gontadenn a Vreizh-uhel "Seurez Kerwenan" gant Dom Duchauchix.

Gallaoueg e gornvro a anaveze ivez met n'en deus embannet netra. Evel kalz a dud a Vreizh-Uhel ne lakae ket e yezh c'henidik war ar memez pazenn hag ar brezhoneg. An hini gentañ a oa yezh e gornig-bro, e familh moarvat, eben a oa dre natur yezh vroadel Breizh, evel yezh keltiek hon diforc'h a-grenn diouzh yezh ar Stad C'hall, ar galleg, ha gouest e oa da gevezañ gant ar galleg war an holl dachennoù : tonket eo ar brezhoneg da vezañ yezh an holl Vrezhoned, hag a zoug dre-se ur raktres dibar evit Breizh : krouiñ el ledenez-mañ ur patrom kevredigezh doujus ouzh hon hennadelezh kristen, ha disheñvel diouzh hini ar stad C'hall a-hent-all : ne vo ket diaesoc'h ober amañ gwelloc'h egeti. Ar mennozhioù broadelour-se, a lenner alies e Imbourc'h, a oa ivez re Glerg, a oa aet zoken, war an diwezhadou, betek gwriat ardamez Breizh war beultrin gleiz e soutanenn !

E 1936 e voe beleget hag e voe kure e Kemper-Gwezenneg, gant Pêr-Mari Lec'hvien ar person kar-e-vro a voe drouklazhet e 1944 gant ar Batrioted. Neuze e stagas d'e dro da stourm kalet evit ar yezh. D'ar mareoù-se eo ivez e kavomp e droidigezhioù kentañ, evel 2 Makabeed.

Goude-se ez eas da Bloubêr, ha neuze e voe anvet da Berson Bulien ha Kaouenneg, tost da Lannuon bepred.

A-raok ar Sened-meur en doa aozet dija un nebeut oberennoù pa veze damzigoret an nor d'ar yezhoù bev el liderezh :

Ofisoù ar C'horaiz hag ar Basion, Emb. Barr-Heol, 1965

Ofisoù ar Pantekost ha gouelioù ar sent, Emb. Barr-Heol, 1965

Gant Vatikan II e voe ar person nemetañ e Breizh a nac'has krenn mont war ar galleg : treiñ a reas al liderezh nevez e brezhoneg, ha gant e gelaouenn e voullas tamm-ha-tamm an ordo-missae nevez. Setu ar roll anezho evit ar Sulioù ha gouelioù-berzh :

Leksional bloavezh A sulioù ha gouelioù B.H. Du 1971

Leksional bloavezh B niv. 1 Sulioù ar C'horaiz ha sul Fask B.H. 1970

Leksional bloavezh B niv. 2 Sulioù Pask, Sulioù ordinal ha gouelioù-berz B.H. 1970

Leksional bloavezh B niv. 3 Sulioù an Azvent ha nav sul kentañ ordinal B.H. 1972

Leksional bloavezh C sulioù ha gouelioù Barr-Heol 1970

Levr-oferenñ evit gouelioù ar sent B.H. 1973

Evit an oferenoù war ar pemdez e voullas ivez oberennoù a voe servijus-tre evit hol labourioù war ar Bibl :

Levr-oferenñ evit an Azvent, amzer an Nedeleg hag an Epifaniezh B.H. 1971 (oferenoù war ar pemdez)

Lennadennoù pemdeziek an Oferenn - Ordo lectionum missae : 8 levrenn Barr-Heol Kerzu 1971 - Mezheven 1973.

A-hent all e voullas oberennoù all evit ar sakramantoù, bepred e ti B.H. :

Ritual ar briedelezh,

Ritual Badeziant ar vugale, 1969 ha 1973

Lidoù ar gonfirmasion.

Evit ar Brevial e voe goulennet outañ gant Job Lec'hvien e 1977 adlenn e levr «Pedenn an Iliz» (a voe advoullet div wech), ha pa ne vanke ken 'met Troidigezh an Tadoù eus an Iliz, e kasas da benn ar mell trevell-se hag e voe moullat tamm-ha-tamm gant Imbourc'h<sup>16</sup> dre aked Paol Kalvez :

Lennadurioù kristen. I. Azvent.<sup>17</sup>

<sup>16</sup> Gant EAT emañ dornskrid an troidigezhioù, ha peder levrenn Brevial Klerg.

<sup>17</sup> Advoulet e voe gant Imbourc'h gant holl bedenoù an Azvent ha Nedeleg, hag un trede embannadur a voe gant Breuriezh Sant Ildud, keinet start ha war baper Bibl, hag a zo o daou an droidigezh pajenn-ha-pajenn eus kentañ levrenn, war beder, ar brevial nevez. Abaoe ez eo kempennet an eil levrenn (Koraiz-Pask), hag an trede a zo divrazet : war 8000 pajennad ez eo graet an tri falevarzh eta, a gavor war hol lec'hienn da bellgargañ : klikañ war "Liderezh an Euriou".

E dielloù EAT an Ao. Troal ez eus ul lizher eus an 10/12/1981 a-berzh Klerg, a restomp amañ un arroud anezhañ :

"Troet em eus ar Brevial penn-da-benn. Soñj hoc'h eus pegement a boan am boa bet da gentañ gant Sant Irenaios.

Lennadurioù kristen. II Korreiz.<sup>18</sup>

Lennadurioù kristen. III. Amzer Fask.

Lennadurioù kristen. IV. Amzer ordinal A.

Lennadurioù kristen. V. Amzer ordinal B.

Lennadurioù kristen. VI. Amzer ordinal C.

Lennadurioù kristen. VII. Amzer ordinal D.

Lennadurioù kristen. VIII. Gouelioù ar Sent. Genver-Ebrel.

Lennadurioù kristen. IX. Gouelioù ar Sent. Mae-Mezheven.

Lennadurioù kristen. X. Gouelioù ar Sent. Gouere-Eost.

Lennadurioù kristen. XI. Gouelioù ar Sent. Gwengolo-Here.

Lennadurioù kristen. XII. Gouelioù ar Sent. Du-Kerzu.

Tu zo d'en em c'houlenñ perak en doa divizet kas da benn al labourioù-se. Eeun eo ar respont a zeu d'ar spered : evit gellout dioueriñ ar galleg, evit gellout gant Liderezh an Iliz katolik, reiñ meuleudi da Zoue war eeun e brezhoneg, a-unan gant holl bobloù ar bed.

Da c'hortoz en devoa nac'het lavarout e Vrevial e galleg : pediñ a rae eta gant ar Brevial latin nevez, hini Vatikan II. Lod o deus tamallet dezhañ koulskoude sevel a-du gant an Aotrou Lefebvre : merzout a c'heller n'eo ket gwir o lenn e gelaouenn. Lavarout a rae e oa ur chañs evit ar brezhoneg hag e oa ret "diac'hubiñ" al liderezh kozh. Diouzh un tu all eo gwir e taremprede lod eus noblañs ar c'horn savet a-enep Vatikan II, en doa dalc'het d'e soutanenn, hag e veze burutellet dichek gantañ a-wechoù emdroadur an Iliz<sup>19</sup>, met netra ouzhpenn.

Person e oa : an dra-mañ a zo a-bouez-tre, a soñj din, evit barn e labourioù war ar Bibl hag al

---

Bremañ avat, ez on kalz barrekoc'h. Tibi semper in caritate Xti, cura te ipsus et amabo te ut aiebat ille vetus Cicero Klerg» (tr. An arroud latinek : Bepred e karantez an Aotrou Krist, gra mat war da dro, te hag a zo karet gant Cicero gozh").

<sup>18</sup> Dianket eo bet e droidigezh. Gant Job Lec'hvien eo an hini a zo bet embannet gant Imbourc'h.

<sup>19</sup> Lenn da skouer BH 90 1976 p. 48 war afer an Ao. Lefebvre.

liderezh dre vras. Rak ne labourer ket "en e vurev" hepken : an person nemetañ e voe o tremen eus al latin d'ar brezhoneg gant Vatikan II. Se a zo kement ha lavarout en deus labourer e doare da c'hellout lidañ evit e barrezianiz : ur pal liturgiek a oa gantañ, ret e oa e vefe degemeret mat an testennoù lennet en ambon, ur brezhoneg na vefe ket re uhel evit an dud, gant ul live uhel-a-walc'h da dreiñ pep tra<sup>20</sup> evelkent.

Klerg ne zisoñje ket e barrezianiz : evito en deus skrivet ur c'hannadig-parrez, "Koulmig ar Gindi", an hini diwezhañ e brezhoneg e Breizh-izel, e brezhoneg ar c'horn-bro, a anaveze mat-tre. Dre ma anaveze ivez mat-tre ar gresianeg hag al latin e chomas aketus da dreiñ pep tra, seul-vui ma stourme e penn-a-raok adnevezadur ar yezh, d'ur mare ma ne veze skoliataet bugel ebet e brezhoneg d'an ampoent. Hiziv an deiz ez eus ouzhpenn 15.000 anezho...

War ar Wikipedia brezhonek e tizolomp ivez ez eo bet Klerg an hini en deus sikouret Añjela Duval da skrivañ. Fellout a rae dezhañ digeriñ stalioù ha reiñ labour d'ar Vretoned, digeriñ skolioù e brezhoneg evit ar vugale, krouiñ ur vuhez vrezhon vodern. Evel Maodez Glanndour en deus dastumet marvailhoù brezhonek, digant Eujen Brigant da skouer, e Ploubêr, er C'houerc'had hag e Bulien. War Prosez Sant Erwan en deus labourer ivez, ur skrid latinek talvoudus bras evit anavezout doare ar gevredigezh e Bro-Dreger en amzer-hont.

E Bulien emañ e vez : marvet eo d'an 28 a viz Gouere 1984 : Gouel Sant Samzun ha Tadoù diazezerien Breizh kristen, uhelvennad e vuhez.

## T. Gwilhmod

---

<sup>20</sup> Leun e oa an iliz gantañ pa veze an Oferenn e brezhoneg e Bulien d'ar Sul. E-pad daouzek vloaz bennak en deus lidet enno e brezhoneg hepken : kement-se ne vije ket bet tu dezhañ ober ma ne vije ket bet degemeret e vrezhoneg gant an dud, zoken ma oa dre ret "brezhoneg-kador", "uheloc'h", eget ar yezh-pemdez, hini ar parkeier.



## Robert Estienne un den dianav eus an Azginivelezh

E-pad an Azginivelezh ez eus bet kalz a vennozhioù nevez, a adreizhoù, ret e oa kavout un doare da skignañ anezho. Kalz a Humanourien o deus kemeret perzh e skignadur ar gouiziegezhioù evit reiñ d'an holl dud an dro da c'hellout tizhout anezho. Robert Estienne, ur mouller humanour, en deus kemeret perzh en obererezh-se.

Petra, en e vuhez, a ziskouez e oa Robert Estienne un den eus an Azginivelezh ? Klask a raimp respont d'ar goulenn-mañ oc'h en em harpañ war vuhez Robert Estienne. Kregiñ a raimp gant gwelout piv 'oa, hag un nebeut oberennoù embannet gantañ, ha da heul e klaskimp studiañ menozioù Robert Estienne en Humanouriezh.

Robert Estienne a oa un Humanour, mouller ha skrivagner ar c'hentañ geriadur galleg. Bevet en deus e-pad an Azginivelezh. Ganet eo bet e 1503 e Pariz, ha marvet d'ar 7 a viz Gwengolo 1559 e Genève. Er bloavezh 1526 e oa deuet da vezañ mouller da heul e dad, hag a oa ivez ur mouller brudet.

Moulet en deus e oberenn gantañ, "*Les Partitions oratoires de Cicérou*" e 1527.

Moulet en deus ivez meur a c'heriadur. E 1539 e voe anvet *imprimeur du Roy* gant ar Roue Frañsez I<sup>añ</sup>, hag er memes bloavezh ez embannas ar Roue reizhadur Villers-Cotterêt. Robert Estienne a embannas neuze an "*Dictionnaire françois latin contenant les motz & manières de parler*" evit skignañ ar galleg, da heul ar reizhadur-se.

Goude bezañ en em droet ouzh ar Galvinouriezh e 1552, en deus embannet e 1553 ar Bibl kentañ e galleg skrivet en un doare nevez a-grenn, ijinet gantañ : didroc'hañ a reas ar Bibl e gwerzadoù,

an doare-se a vez implijet dre holl hiziv an deiz c'hoazh.

An Humanouriezh a zo ul lusk kefredel en em ledas en Europa er XV<sup>vet</sup> kantved. Un doare soñjal eo hag a lak an talvoudoù denel a-us d'an holl dalvoudoù all. C'hoant o doa ledañ ar gouiziegezhioù hag adnevesaat an doareoù-deskiñ. Robert Estienne, evel Humanour, e oa an tro spered-se gantañ. Kemeret en deus perzh e emled ar mennozhioù nevez, an adreizhoù dre e vicher mouller. Ar geriadur "*Dictionnaire françois latin contenant les motz & manières de parler*" a zo bet graet, da gantañ, evit studiañ,



met a-bouez eo bet evit ledañ ar galleg hag an deskadurezh. Moulet en deus kalz a oberennoù evit an deskoniadur. Ne oa ket hepken ar yezh a zedenne anezhañ, bez' e oa ivez ar relijion, rak embannet en deus ur Bibl evit ar Galvinourien dre ma oa o paouez en em dreñ ouzh o feiz. Kemeret en deus perzh e emled ar ouiziegezh, ar mennozhioù nevez, an adreizhoù oc'h embann oberennoù evel ar geriadurioù pe ar Bibl.

Robert Estienne a oa un den barrek war meur a zachenn : ar moullañ, ar yezh, ar brederouriezh... Un den a-bouez eo bet evit ar galleg a-drugarez d'e c'heriadurioù. Dedennet e oa gant meur a dra, ha daou dreist holl : ar yezh hag ar relijion. Kemeret en deus perzh e emled ar galleg goude reizhadur Villers-Cotterêt, embannet en deus meur a oberenn war-dro an deskadurezh, kemeret en deus ivez perzh en Adreizh Kalvinour en ur voullañ ur Bibl evito ; gant an holl draoù-se, e c'heller lavarout ez eo Robert Estienne un den eus an Azginivelezh.

**Erle**

## Ur Galon drugarezus eo Jezuz

(Prezegenn eil Sul Fask, Gouel an drugarez, ensavet gant sant Yann-Baol II)

Liderezh Sul an Drugarez, Sul ar *Misericordia*, a ganmeul abaoe pell kendruez, hedrugarded an Aotrou Doue disklêriet gant an Dasprenadur, a zo c'hoarvezet dre Basion, Marv ha Dasorc'hidigezh an Aotrou Krist emaoamp o paouez lidañ.

E Gendruez a zo bet degaset soñj anezhi, en hon amzer, dre an daolenn a oa bet goulennet gant Jezuz E-unan digant ar Wenvidigez C'hoar Faostina a Grakovia e Polonia.

Mat e vo deomp skejañ ar ger *misericordia*. Bez' ez eus ennañ : *miseria* = truegezh ha *cordia* = kalon. Ur galon a zen o tostaat ouzh un druegezh denel. An den trugarezus eo an hini a samm, a galon, an druegezh.

Pa vez kendruez, e pardoner, ez adsaver ; e talvoudekaer, e frealzer, e harper, e pareer. Blein ar garantez eo ar gendruez, an hedrugarded.

Hi eo ar Garantez Doueel oc'h en em zispakañ, o vleuniañ a-grenn hag oc'h en em skuilhañ war ar re-vat ha war ar re-fall. Doue a zo Karantez kendruezus. Emzalc'h an Tad e-kenver e vugale ne c'hell bezañ ensilet enno nemet gant e gendruez. Bez' e c'heller lavarout en deus-Eñ ur c'herc'henn, ur galon a vamm gouest da skrijadennañ, da fromañ, da dridal. Kendruez digemmesk eo an Aotrou Doue.

Hogen, kendruez, hedrugarded, "Tad ar c'hendruezioù" (2 Kor. 1) a zo bet diskuliet ha deuet da vezañ efedus er C'hrist Jezuz.

E Jezuz a Nazared, en em ziskouez, en he holl splannder, Kendruez Doue.

Ar Mab-se eo skeudenn fealañ an Tad, "An Pardoner-pec'hedoù Meur" hervez lavarenn Juluan Green.

Dasprenadur an den eo oberenn Karantez kendruezus an Aotrou Doue. En e Vab graet den, e fell d'an Tad dastum holl reuzidigezh an droug d'ober eus ar reuzidigezh-se kendruez. Ar pec'hed a zo nac'h karantez ouzh an Doue Mat. Ar C'hrist avat, en ur ginnig e boanioù hag e varv, gant ur garantez hag ur santelezh divent a ro, diharz, d'an Drielezh muioc'h a garantez eget ar pec'hed-se. Jezuz a zo eta holl-c'hronnet gant kendruez divuzul an Tad.

Lavarout a ra-Eñ d'ar C'hoar Faostina : "*Kement tra a zo, a ziskuih e askre va c'hendruez,*

*startoc'h, donoc'h, dirgeloc'h eget ur bugel e askre e vamm*". Lavarout a raio c'hoazh : "*Brokusoc'h, largentezusoc'h ez on evit ar bec'herien eget evit an dud reizh. Evito em eus skuilhet va holl Gwad. Arabat dezho kaout aon da dostaat ouzhin*".

Setu perak e krede lavarout Tereza a Lisieux : "*Ha p'am bije war va c'haouded, war va c'hreizhon, an holl bec'hedoù a c'heller ober, ez afen, rannet va c'halon gant ar c'heuz, d'en em daoler etre divrec'h Jezuz. Rak koleziñ, karout a ra ar mab foran a zistro davetañ*".

Yann-Baol II en deus kelennet : "*N'eus pec'hed re vras ebet, hini ebet brasoc'h eget kendruez an Aotrou Doue*".

Arabat eta dic'hoanagiñ, diskrediñ. Lezomp divrec'h an Tad serriñ warnomp. Lezomp sell ar Mab diskenn warnomp.

Ur Galon drugarezus eo Jezuz. Setu c'hoazh komzoù Jezuz d'al leanez Faostina : "*Ret eo dit gouzout, va c'hrouadur, ez eo an diskredoni eo am c'hloaz muioc'h eget an holl bec'hedoù. Diskrediñ a rez eus va madelezh, goude din bezañ poaniet kement o karout hag o kendrueziñ*".

Den ne c'hell bezañ stlapet kuit eus ar gendruez, m'emañ war-c'hlask anezhi. Roet e vez bep tro m'emañ ar pec'her o keuziañ. Al laer mat kroazstaget a c'hounezas ar vuhez peurbadus dre ma anzavas e bec'hed.

Doue ne skrap ket an eneoù. Ne wall ket hor frankiz. Gervel a ra. Reiñ a ra arouezioù. A-walc'h eo, gant izelded, kejañ gant an Dasorc'had. Eus e Galon treuztoullet, hor gronn gant e skinoù a c'hlanidigezh hag a santelidigezh. Neuze e tarzh ennomp ar peoc'h, peoc'h Doue.

Un Tad a oa o prezeg ouzh karmeziadezed : "*Va C'hoarezed, emezañ, c'hoant am befefe ho pefe graet ur pec'hed du, ur pec'hed bras...*" Edo dija ar briolez gant ar soñj d'en em zizober anezhañ, pa oa anat ne oa ket e benn gantañ, pa ouzhpennas ar beleg : "*Nann fellout a ra din lavarout deoc'h ez eus ur c'hras kaer-tre ne c'hell ket buheziñ an eneoù dinamm. Da lavarout eo ar peoc'h roet gant kendruez Doue d'ar bec'herien vrasañ*".

**Youenn Troal**, Treogad (1999).

Jedadenn diwar sifroù bet lennet e kelaouenn “L’Homme Nouveau” : 80% eus an euredoù nulet gant ar justis e Frañs (ha n’eo ket an torroù-dimezi) a c’hoarvezfe diwar euredoù sivil gant un den -gwaz pe maouez- n’en defe ket ar geodedelezh c’hall , hag an euredoù-se a vefe well-wazh ouzhpenn ur palevarzh eus niver an euredoù e Frañs. Neuze, emezon, e c’hortozer e savfe an torroù-dimezi-se d’ur palevarzh eus an torroù-dimezi ivez, da lavarout eo 25 % ha n’eo ket 80 %. Se a ro da soñjal e vefe **55 % eus an euredoù gant estrenien, “euredoù-koad”**, da c’hellout enbroañ aesoc’h e Frañs evit an darn vrasañ anezho. An hanter a zo maouezed, o devezo ouzhpenn tri bugel. Kalz muioc’h eget ar geidenn e Frañs, a zo dindan daou hiviziken. Anat eo n’eo ket kristen enebañ ouzh istor ur garantez o vleuniañ etre daou zen estren, hogen aze e weler ez eo un emdroadur a-yoc’h a zegas digempouezioù diremed d’ar gevredigezh.

Aotreet eo bet gant ar Pab d’ar 27 a viz Meurzh e c’hello beleien Breudeuriezh Sant Pius X reiñ sakramant ar Briedelezh en anv an Iliz. Dija en doa aotreet dezho reiñ sakramant an adunaniñ e dibenn “Bloavezh an Drugarez”. Se a ro da grediñ **e vo kompezet dizale an diaesterioù gant ar Vreudeuriezh ha Roma**. Bennozh da Zoue !

Hiviziken **10 % eus beleien Frañs a zo a orin estren**, eus Afrika du alies.

Divizet o deus eskibien Frañs kemm dibenn ar Bater e galleg : e-lec’h “*ne nous soumet pas à la tentation*” e vo lavaret “*Ne nous laisses pas entrer en tentation*”. Poent e oa. Lavarout a reomp-ni “N’hol lezit ket da gouezhañ en temptadur”. Da notañ ne-d eomp ket dre “Te” ouzh Doue an Tad.

E derou ar bloaz-mañ e oa aet da Anaon **Evelyne Sullerot, unan eus diazeourien ar Planning familial** e Frañs. Meulet eo bet ar vaouez-se gant maodierned c’hall hag ar meziennoù, eveljust, met n’o deus ket meneget he doa troet he chupenn, pellik’zo avat. E 2006 he deus skrivet ul levr a veneg an tri zispac’h o deus gwall-hejet ensavadur an Tiegezh : ar bilulenn-hilastaliñ, ar frankizadur revel, ha dizoloadenn an ADN. El levr-se e lavar meur a wirionez a ziskouez ne oa ket mui stourmerez benelour arloupet he yaouankiz : Keheladur ar

blijadur diouzhtu-kaer a zo trec’h war ar c’hoant da ober e vuhez dre ar sevel-tiegezh : breskaet eo bet ar c’houbladoù d’ar poent m’eo bet distaget an engehentadur diouzh ar revelezh. Klemm a ra ivez war ar fed m’eo difennet er pleustr da gomz war efedoù drastus-bras an torroù-dimezi war ar vugale. Kounaat a ra e oa bet ijinet un dro-lavar e Kuzul-uhel ar boblañs hag ar familhoù pe veze anv a Familhoù bruzhonet/*éclatées* : ret e oa lavarout “*familles libérées*”/dieubet, anez bezañ gwelet fall ! Hervezi, evelkent, e c’heller gortoz gant fiziañs ur vad diwar an “dispac’h genetek”, a roio ur penn-pouez d’ar mabelezh/*filiation* : alese e vefe lakaet un harz da arc’hadur “ar gwir da gaout ur bugel” a-berzh ar maouezed dizimez hag ar paroù heñvelrevat. Hervezi eta, an ADN a roio ar gwir d’ar vugale da anavezout o orinoù hervez ar gwad hag a roio muioc’h a bouez d’an Tadoù a zo bet koulz-lavaret pennasket gant heuliadoù 68. Siwazh, abaoe 2006 ez eo gwashaet an traoù a galz, gant ar PMA hag ar GPA, an euredoù evit ar paroù heñvel-rev : netra a vad n’en em ziskouez, ar c’hontrol eo !

Anzav a ra ez eo **diroudet abred ar Planning familial gant ar benelouezed** : deuet e oant da nac’hañ gwirvoud ar c’houblad ha da skarzhañ an Tadoù, gant ur gasoni hag “ur c’houzañvadouriezh”divuzul, da c’hounid ar “gwir” da ziforc’hañ ar vugale. Hervezi an hilastaliñ a oa an diskoulm a-enep an droug : an diforc’hañ-bugale. A-enep e oa da ober eus an diforc’hañ-bugale ur gwir, un “hilastaliñ-bis”, ur “gwir da zistrujañ”, emezi. Penaos e vefe lavaret “idiote-utile” en brezhoneg ? Evel Simone Veil, a oa bet gwelet o tiskelañ a-enep eured Taubira e kaver un istor tud a youl vat a c’hoari gant buhezioù-tud. Pet milion a dud lazhadeget dre o gwall abaoe e Frañs ? Ouzhpenn dek milion. Div wech Breizh.

Gant Dastum eo bet embannet e 2016 ul levr gant 3 CD “**Kement-se alato ! Istorioù farsus**”. N’em eus ket kavet farsus. Hini ebet, **divalav, ne lavaran ket !** An istor gentañ a ziskouez ur beleg gantañ ur c’had dindan e soutanenn, an eil ur c’har-maouez imboudet d’ur paotr : pa ya da droazhañ ez eus ur c’har a bleg pe chom egile eeun... An trede un istor merc’heta a daolenn un den sod, ar pevare Avoultriezh e ... Kerizinenn ! Ar pemvet un istor togoù blaz ar c’hozh ganti. Ar C’hwec’hvet, blaz ar c’hozh ganti adarre, a ra

goap ouzh ur c'houblad kouerien na anavezent ket petra eo ur meleour. Ar seizhvet o leurenniñ hor Salver n'eo ket fall en holl peogwir e ra anv eus an tebet "stourm evit an ingalded"etre ar baotred hag ar merc'hed, nemet, adarre hon eus adarre un istor avoultriezh ! An eizhvet a ra goap ouzh sakramant an adunaniñ. An navet zo hudurniezh. An deket a ra goap adarre ouzh ur beleg tapet glapez war briz an oferennou. An unnekvet a zo "Pipi an Dogan" he zalbenn : n'eo ket dav lavarout muioc'h. Degouezhet gant ar c'hard eus al levr, n'on ket aet pelloc'h. Gant Mark Kerrain e oa bet embannet ul levr "farsus" a seurt-se dek vloaz 'zo. Lennegezh rummad 1968 aet war an oad.

### **Kantvet deiz-ha-bloaz marv Y-B Kalloc'h.**

D'an 10 a viz Ebrel 1917, e voe lazhet an isletanant Kalloc'h gant un tarzh obuz war vevenn koad Urvilliers e-kichen Saint-Quentin. Douaret e voe e bered Cérisy (Aisne). E 1923, d' an 9 a viz Gouhere, e voe degaset e relegou d' e enezenn c'henidik. Ganet e oa bet Yann-Bêr Kalloc'h en Enez Groé d'an 21 a viz Gouhere

1888. Pesketaer oa e dad. E vamm, a zeue eus Lokmikelig, ur gêriadenn pesketaerien tost ouzh an Oriant. Skrivañ a reas meur a bennad e meur a gelaouenn : "Le Pays Breton", "Le Fureteur Breton" "Ar Bobl", "Brittia", "Dihunamb", "Kloc'hdi Breiz"... a sine gant e anv-pluenn "Bleimor". Diazezet eo brud *Bleimor* avat, war e varzhonegoù strollet en dastumad *Ar en Deùlin* (War an Daoulin), bet embannet war-lerc'h e varv, evit ar wech kentañ, e 1921, gant e vignon Pêr Mokaer, ma-z eus ennañ ar barzhoneg brudet *Me zo ganet e kreiz ar mor*, a vez kanet hiziv gant an holl ganerion vreizhat. Awenet uhel eo barzhoniezh *Bleimor* gant ar feiz kristen hag ar garantez-vro. Ur pennad klokoc'h war oberenn *Bleimor*, gant Youenn Caouissin, a vez kavet war lec'hienn *Ar Gedour*. Embannet e vez an hevelep pennad war Breizh-info, ha war ar gelaouenn War-Raok.

Tu zo prenañ Oberenn Kalloc'h e peurunvan e ti Daskor (<http://www.daskor.bzh/fr/node/1408>) pe war-eeun digant ar mouller (<http://www.thebookedition.com/fr/war-an-daoulin-p-350100.html>) : 8 euro (11,20 euro franko)

## **Buhez hon Emglev**

**Ur prof 200 euro** a berzh un ezel en deus servijet da brofañ ur skouerenn eus **Katekiz ar vugale** hon eus moulet e miz Ebrel d'un nebeut beleien ha kloareged brezhonegerien : bennozh Doue dezhañ.

**Izili zo eus EAT o deus gellet en em gavout da sadorn Fask en Naoned** evit koan ha rannañ keleier a-bep seurt. Kaset o deus ganto «Katekiz ar vugale».

**Ezhomm 'zo kreskiñ niver adlennerien ar Bibl** emaomp o vont da embann. En amzer Bask emaomp : amzer da glask an Uioù-koukouk, neketa ?! A-walc'h eo bezañ boaz da lenn

brezhoneg ha da notiñ ar fazioù a gavor en destenn. Pa vo moulet ne vo ket tu da zifaziañ ! Goulenn a reomp digant kement hini a c'hell adlenn un tamm bihan eus ar Bibl evit an tennad-hent hir-mañ, a-raok ma c'hellimp kregiñ gant ar maketenniñ. Skrivañ da [eat@orange.fr](mailto:eat@orange.fr)

**E Gouel Broadel ar Brezhoneg e vo ur stand gant Emglev An Tiegezhioù** e Langoned d'ar Sadorn 20 a viz Mae.

En **Tro-Breizh** da zont, Kastell-Paol-Landreger, e vo izili eus EAT o kinnig ur chabistr-pirc'hirined brezhonegerien. Enskrivadurioù <http://www.trobreiz.com/>

### **Mererezh :**

18 €eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* . Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

### **Skridaozerezh :**

Ar pennadoù a zo da gas da : [jean-mariemichel@neuf.fr](mailto:jean-mariemichel@neuf.fr) , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X